

YF_0036_Korantina

Me am-boea bet eur vestrez anvet Korantina
Ha honnez a oa eur plah, ya deuz ar re vraoañ

Mar ho-pije bet gwelet anezi gand he hoof dantelez
He zavanjer satin glaz, he dilhad bretonnez

C'hwi ho-pije lavaret: « Euruz ar paotr yaouank
An hini a vije karet gand eur plah ken charmant

Dond a ra ivez e-barz he 'fenn sorhenn ar yaouankiz
An devez ma he-doa kuitet evid mond da Bariz

Lavaret e oa bet dezi e-barz ar ger gapital
E vije gounezet arhant en eur bourmen, en eur zansal

Lavaret e oa bet dezi eno e-barz ar ruiou
E ruille ar peziou aour evel an dour er gwaziou

Med a-benn c'hwec'h miz goude, na pa oa hi deuet en-dro
Ma ho-pije bet gwelet anezi, peseurt tra divalo

War he 'fenn e oa eun espes paraplu
Dekoret gand bokejou glaz, melen, roz ha ruz

E-barz he zreid e oa ivez, un espes botou-ler
Ya oa keiid un talonou, na deus Paris don d'ar ger

Ke d'ar ger 'ta, ma mestrez! Ke da chench da zilhad!
Na chomit ket evel-se, dirak ma daoulagad

Ka na-in tefe da laret din, ha nag en devezh-hirie
Ha na-in tefe da laret din, na honnezh zo bet ma mestrez

Ka vefe bet de lakan c'haon, na de rosed gant at vezh